

KIS-839 – Div gudennig eus yezh ar Fizik

(YBAN da GE – 25 01 05)

Abaoe derou Genver e 'm eus pleustret muioc'h war ar Fizik, kalz diskuizhusoc'h e gwirionez. Daoust ma verzhan e 'm eus kudennoù a-wechoù evit kavout ur c'hevatal gallek d'ur ger brezhonek, evit ar Fizik zoken. Da skouer Br. *eiltreñ*, Gl. ? Pe c'hoazh Br. *arc'hronnenn*, Gl. *phase dispersante, milieu dispersif*? Pe Br. *arc'hoalenn*, Gl. *phase dispersée*? N'ouzon ket ha hanc'herioù zo evel e brezhoneg. Evit ar mare e tizh ar geriadur (doare *Geriadur ar Jedoniezh*) ur 50 pajenn bennak evit ar rann brezhoneg-galleg. Rakwelout a ran enta ul levr damheñvel a-fet ment.

Un dra farsus a-fet gerdarzh. Da gevatal da Br. *aerbouezer ec'haezh* e kaver a dra sur Gl. *baromètre anéroïde*. Ar Petit Robert a ro :

“**anéroïde** adj. m. – 1844 pour *anaéroïde* ; de *a-* et gr. *aeroeidês* « aérien ».
Phys. Vx Qui est sans liquide.”

E gwir ez eo iskis an despizadur ! “Hep liñvenn” n'en deus netra da welout gant “tennet dioutañ an aer, hep aer”. Klasket 'm eus en Oxford Dictionary ha setu :

“**aneroid** *a. & n.* (Barometer) that measures air-pressure by its action on elastic lid of evacuated box, not by height of fluid column [f. F *anéroïde* f. Gk. *a-* not + *neros* wet . See -OID]”.

Gant piv emañ ar wirionez ? Bezet a vezo ez eo mat *ec'haezh*. Ha soñj 'c'h eus a voe ar c'hevatal gallek e mare savidigezh kentelioù Fizik SADED ?

(GE da YBAN – 28 01 05)

Rankout a rez lakaat geriennoù liestamm gallek a-dal d'an termenoù brezhonek (an hevelep hent a 'm eus ranket kemer er Brederouriezh), un azon mat eo.

Ya, an termen *anéroïde* oa el levr Fizik a dalveze da sevel kentelioù SADED. Ar yezhoniourion a ro lies gerdarzh da Gl.Sz. *anéroïde / aneroid*. Evel a lavarez, ez eo farsus, met aes da gompren. Ijiner an aerbouezer-se ne oa ket yezhoniour ha fardet en deus ur skritell evit e ijinadenn hep displegañ moarvat penaos en doa he fichet. Hag en un diskiblezh ma ren unkemeradezh an termenou ne laze da zen e c'houzout. Ar yezhoniourion deuet da c'houde a savas o goulakadennoù. Ha lennet 'c'h eus *Le Pleure misère*, an droidigezh ma kenlabouras Alan AR BERR eus ur romant iwerzhonek ? Un Iwerzhonad en doa lerc'hwezet oc'hadennoù e borc'hell ha kaset al lerc'hwezedenn d'ur yezhoniour ; a-raok pell, setu holl rannoù keltiek Skolioù meur ar bed oc'h embann studiennoù war an deodyezh ouezelek nevez-se, hag an tabutoù etre dalc'hiaded lies arlakadenn...

A-fet skritell, ne zisoc'h ket muioc'h ster Br. *aerbouezer* eus ster e gedrannoù. Heñvel dra, Gl. *tension artérielle, tensiomètre* zo ganto un torgamm gerdarzhel (un tued d'ar glanyezhañ a zoug an aozerion da gomz bremañ a *pression artérielle*). Soñj 'm eus en doa KLERG skrivet din : « c'hwi a skriv *gwask ar gwad*, du-mañ e vez lavaret *pouez gwad zo gantañ...* »